

*par M. P. P. P.
Cure de Lannion*

KANTIK

DA

SANT YANN-BARDOZOUR

War don : *Ilis ma farouz*

DISKAN

*Sant Yann, tad iliz Lannuon,
Gret ma heulfomp a greis kalon
Lezen Doue, vel hon zud koz,
Wit mont eun de d'ar Baradoz.*

I

Mab da zantez Elizabeth,
Sant Yann, dre vuzud oa ganet,
Hag e dad, herve giz ar vro,
Dlee rei d'hezan eun hano.

II

Mez 'boë nao miz e dad oa mud,
Ha zouezet braz oa e dud
Pa skrivaz war eun dolennik :
« Yann eo hano ma bugelik ».

III

Kals mui zouezet e c'hoaint c'hoas
P'hen klewjont o koms vel biskoaz :
« Petra, mē, vo ar bugel-man,
» Rag dorn Doue a zo gant-han ? »

IV

Sant Yann, pe oa bugelik c'hoas,
A c'hez da chom en eur c'hoat braz ;
Eno tremene e vue,
Er binijen, er baourente.

V

War dro tregont wloas e tisken
Da brezek, war ribl ster Jourden,
Eno e ro ar vadeiant
Da gement hini a neuz c'hoant.

VI

Jesus d'e dro a eruas,
Ha Yann d'an oll Hen diskouezas :
« Sed oan Doue, zetu aman
» N'Hini doug pec'het ar bed-man ! »

VII

Jesus a ziskennas er ster ;
Pad ma vadee he Zalver,
Yann a glevas ar c'homzo-man :
« Zetu ma Mab, zentet out-han ».

VIII

Diwar ben Yann, Jesus d'e dro,
Lare : « N'eus ganet, n'ag na vo,
Eur mab dirak Doue ken bras
Evel Yann, mab Zacharias.

IX

Skoter a nerz hag a zantelez,
Yann a lare da Herodez :

« Ho preur zo beo, na dleget'h ket
« Miret he vreg wit ho pried ».

X

Merc'h homan, da ouël ar roue,
Dirak-han ken brao a zanze,
Ma laraz : « Goul sort a giri,
« Me rei d'id pez a c'houlenni ».

XI

Ha gand he mam kelennet mad :
« Pen Yann, emei, a fell d'in kad ! »
Yann, er prison, oa dibennet,
E ben d'ar plac'h fall oa roët.

XII

O zant Yann, tad hon zado koz,
Warnomp-ni skuillet ho pennoz,
Teurveet, hirie, hon diwal
A bep drouk 'vel hon zud gwechall.

XIII

Rag hon c'halon, vel ho hini,
Zo stag ouz ilis ar Baly ;
Na zo neblec'h ilis ken koant,
Vel iliz koz ma badeiant.

XIV

Reit ho pennoz d'ar vam, d'an tad,
Gret ma rofoïnt, dre oll, skouer vad,
Roet d'he iec'het ha furnez,
Wit ren ervad ho ziegez.

XV

Wit, en-ho foan, vo stad enhe,
Gret vo zentus ho bugale !
Ma chomo fur ar iaouankis,
Stag ouz Doue, ous an ilis !

XVI

Miret bugale Lannuon
C'hone bara war ar mor don,
Eus an avel hag ar reier ;
Gret ma tistrofoïnt iac'h d'ar ger.

XVII

Dalc'het dreist oll beo en hon c'hreis
Ar fe a ra enor hon Breiz.
Gret ma lugerno, vel gwec'hal,
Kroas hon badeiant, war hon zal.

